

Mignoned ker,

Sed aze un nebeud keloù eus ar skol. Ur bern raktresoù 'zo bet kaset da-benn dibaoe miz Here, hag un toullad reoù-all a zo raktreset betek fin ar bloavezh skol.

Chers amis,

Voici quelques nouvelles de l'école. De nombreux projets ont été menés depuis le mois d'octobre, et d'autres sont à venir d'ici la fin de l'année scolaire.

Fest-noz an Ankoù ha Kala-Goañv

Kanet o devoa ar vugale ton « Al Laouenanig » e-kerzh Fest-Noz An Ankoù a oa bet aozet en Treou e-pad vakañsoù an Hollsent. Plijadur 'oa bet a-dra sur !

Lidet e oa bet Kala-goañv er skol d'an 21 a viz Here. Fardet 'oa bet gwastilli tasmantoù da zebriñ gant ar c'hlasad skol-vamm ha treuzwisket e oa an holl. Ur sonadeg vihan a oa bet kinniget gant bugale o doa kaset o benveg sonerezh, nag ur blijadur !

Fest-Noz de l'Ankou et Halloween

Les enfants ont chanté « Le roitelet » lors du Fest-Noz de l'Ankou organisé à Trévou-Tréguinec pendant les vacances de la Toussaint. Ils ont suscité l'engouement, la relève est assurée !

Les enfants ont fêté Halloween à l'école le 21 octobre. L'occasion pour les élèves de maternelle de préparer des gâteaux fantômes pour le goûter. Tout le monde s'était déguisé. Un petit concert a été proposé par des élèves qui avaient amené leurs instruments de musique. Ce fût une belle journée !

Abadenn Karen Wenul

E miz Du, 'oa deuet Karen Wenul deus Bro-Chile, eus ur gêriadennig Mapuche. Plijout a ra kalz an natur d'ar gumuniezh-mañ ha lavaret he deus e profe an natur ur bern traoù deomp : dour, frouezh, kig, legumaj... Setu perak e oa hi gwisket e du nenn-kil-ha-troad : arouez an douar strujus eo. Displañe deus an arouezioù a vez kavet war baniel ar Mapuche. Diskwelet he deus ar binvioù sonerezh a vez implijet gante ha gellet o deus ar vugale implij anezhe ! Desket 'oa bet div ganaouenn anvet Melitroy ha Chaliken ha kontet he doa ur gontadenn gant ul louarn a gane faos.

La visite de Karen Wenul

En novembre, Karen Wenul est venue du Chili, d'un petit village Mapuche. La nature est au centre de sa communauté. Elle a expliqué que la nature nous fait beaucoup de cadeaux : l'eau, les fruits, la viande, les légumes... Voilà pourquoi elle est vêtue de noir : cela représente la terre fertile. Elle a présenté les symboles du drapeau Mapuche. Elle a ensuite montré les instruments de musique qu'ils utilisent et les enfants ont pu les tester ! Elle leur a appris deux chansons : Melitroy et Chaliken, puis elle a conté l'histoire d'un renard qui chantait faux.



An holl a zo bet plijet bras gant an abadenn ! Amañ e oa Bleuñvenn Konan evit jubenniñ e brezhoneg ar pezh lâre Karen e Kastilhaneg pe e Mapudungun. Trugarez vras dezho !

Tous ont beaucoup apprécié l'animation ! Bleuñvenn Konan interprétait en breton ce que Karen disait en Espagnol ou en Mapudungun, la langue Mapuche. Un grand merci à elles !

Kinniget e oa bet ivez stalioù dizarbenn ar feulsterioù graet d'ar vugale, buhez gant ar gevredigezh Joa. Ur prantad o oa bet kinniget d'ar vugale ha da c'houde d'ar gerent. Dedennus-tre 'oa bet an eskemmoù.

Des ateliers de prévention des violences faites aux enfants, ont été animés par l'association Joa, auprès des enfants, puis auprès des parents. Les échanges ont été enrichissants.

Nedeleg laouen !

D'ar 6 a viz Kerzu e oa bet lidet gouel Nedeleg ar skol e sal ar gouelioù e Louaneg. Ur sapre abadenn a oa bet prientet gant ar vugale. Fardet e oa bet gwastilli gant ar familhoù ha profet ur banne gant an AEP. Gireg ha Marvion o deus graet war-dro stal al levrioù... ha deuet e oa an Tad Nedeleg ! Ur blijadur ! Mersi bras d'an holl !

D'an 8 a viz Kerzu, e oa bet ar skolidi skol-vamm betek levraoueg Louaneg da gaout ur prantad lenn ha da sellet ouzh ur gontadenn Nedeleg savet gant tresadennoù luc'hbannet. Divoutin ha plijus-tre e oa. Mersi bras da Noémie ha da Alice evit ar prantad-mañ !

D'an 12 a viz Kerzu o devoa ar vugale kaset ar mintinvezh o fardañ boued : gwastilli chokolad, soubenn legumaj, pizza ha gwastilli bihan graet gant chokolad... a-raok prientiñ ha kinklañ ar sal hag an taolioù evit bezañ gouest da zebriñ ur pred lipous ! Debret mat o doa ha kanet kanaouennoù a-bep seurt... Hep disoñjal ober ur pezh mell skaotaj da c'houde !

D'an 13 a viz Kerzu e oant bet o pourmen da welet ar mor. Selaouet o doa trouzioù an natur, an delioù, ar mor ; ha c'hoariet e-mesk ar bili. Ne oa ket tomm an amzer !

Evit lidañ vakañsoù Nedeleg hag ar goañv o doa gwisket ar re kentañ-derez o fijama er skol d'ar 15 a viz Kerzu ! Nag un devezh plijus ha dreist-ordinal !

Joyeux Noël !

Le 6 décembre a eu lieu le spectacle de Noël de l'école à la salle des fêtes de Louanec. Les enfants avaient préparé un beau spectacle, avec l'aide précieuse de Katell Le Coqguen. Les parents avaient réalisé de bons gâteaux et l'AEP a offert un pot à boire. Gireg et Marivon se sont occupés du stand de livres du Comité de Soutien... et le père Noël est venu ! Quel beau moment partagé !

Le 8 décembre, les enfants de maternelle sont allés à la bibliothèque de Louanec pour une séance de lecture et découvrir un conte de Noël raconté par des dessins projetés. Quelle manière originale et plaisante de conter. Un grand merci à Noémie et à Alice pour ce moment !

Le 12 décembre, les enfants ont passé la matinée aux fourneaux à cuisiner des gâteaux et mendians au chocolat, de la soupe de légumes, des pizzas... avant de préparer et de décorer la salle et les tables pour savourer un bon repas ! Ils se sont régalez et ont chanté des chansons en tout genre... sans oublier de faire la vaisselle !

Le 13 décembre, les enfants sont allés au bord de la mer écouter les bruits de la nature, des feuilles, de la mer ; jouer dans les galets. Il faisait froid !

Le 15 décembre, pour fêter l'hiver et les vacances de Noël, la classe d'élémentaire a passé la journée en... pyjama ! Quelle belle et extraordinaire journée !





Bloavezh mat !

E miz Genver e oa bet krouet lizheroù bloavezh mat gant ar re vihan ha kaset anezho dre an ti post da c'houde !

Fardet oa bet ivez kachennoù ar rouaned : unan gant amandez, hag eben gant avaloù. Ar vugale o doa peilhet ha troc'het avaloù, mesket an aozennoù, lakaet amann da deuziñ, torret uioù, poazhet ar gwastilli... Ha debret anezho tout da c'houde ! Ul lip e bav ! Gant piv e oa bet kavet ar favenn ?

Er c'hoad int bet d'ar 17 a viz Genver. Selaouet o doa ur gontadenn a vro Rusia, « ar vaneg », un hentad sport o doa graet, ha delioù kelenn a oa bet dastumet. Gwelet o doa ar c'hoad e-kerzh ar goañv : uhel ar rinier, ha nebeud a zelioù er gwez. Glav ha grizilh 'oa bet, kalonek int bet evit kerzhout e-pad pell ! Gant Lupita ha Loona e oant, div stajiadez er skol evit ar sizhun.

Bonne année !

En janvier, les enfants de maternelle ont réalisé des cartes de vœux avant de les adresser par la poste !

Les enfants ont aussi préparé des galettes des rois : une à la framipanée et l'autre aux pommes. Ils ont épluché et coupé des pommes, mélangé les ingrédients, fait fondre du beurre, cassé des œufs, cuit les gâteaux... Et tout mangé ensuite ! Un délice ! Mais qui a eu la fève ?

Les élèves se sont promenés au bois le 17/01. Ils ont écouté un conte russe « la moufle », fait un parcours de sport, et ramassé des feuilles de houx. Ils ont observé le bois en hiver : la rivière déborde, et il n'y a plus beaucoup de feuilles dans les arbres. Il a plu et grêlé, ils ont été courageux et courageuses tant ils ont marché ! Ils étaient en compagnie de Loona et Lupita, deux stagiaires pour la semaine.

Gouel ar Gouloù

D'an 2 a viz C'hwevrer e oa bet lidet Gouel ar Gouloù er skol. Tommet e oa bet ar c'hrampouezh degaset gant ar familhoù hag e oa bet ledet amann, kaotigell, chokolad warne... Ul lip e bav adarre !

D'an 9 a viz C'hwevrer int retornet e Koad ar Stivell. C'hoarioù reteri hag en em lec'hiañ a oa bet kinniget gant Marilou hag Audrey. Gant Nolwenn ha Faned e oa bet kinniget livañ div wezenn e doare an arzour Andy Goldsworthy, oc'h ober roudennoù war ar gwez gant fank. Pegen plijus adkavout ar c'hoad dindan heol miz C'hwevrer !

Gouel ar Gouloù

Le 2 février, les enfants ont fêté la Chandeleur à l'école. Les crêpes amenées par les familles ont été réchauffées puis tartinées de bonnes choses : chocolat, beurre, confitures... Un délice !

Le 9 février, ils sont retournés au bois du Stivell. Marilou et Audrey ont proposé des jeux d'orientation aux enfants, tandis que Nolwenn et Faned proposaient de peindre deux arbres à la façon de l'artiste Andy Goldsworthy en faisant des rayures de boue sur les troncs. Quel plaisir de retrouver le bois sous le soleil du mois de février !



Plijet bras eo bet bugale ar skol gant an **abadennoù gouren** kaset gant Tugdual. Kentelioù kouronkañ a zo bet heuliet ivez gant ar rummad kentañ-derez e poull-neuial Tregastell.

Gireg Konan, anavezet mat gant an holl er skol, a zeu bep meurzh beure da gontañ istorioù, ha da gelenn kanaouennoù ha rimadelloù dastumet gantañ alies mat e Bro-Dreger. Gireg eo « tad-kozh » ar skol : anavezout a ra ur bern istorioù kozh diwar-benn bro Louaneg, modoù bevañ gwechall gozh, ar mod ma vije kanet ha komzet gwechall. Skrivet ez eo bet al levr « Eostad » gantañ zoken ma fell deoc'h gouzout hiroc'h diwar-benn gerioù ha troioù-lavar ar vro.

Les enfants ont beaucoup apprécié les **cours de Gouren** proposés par Tugdual. Des leçons de natation ont aussi été proposées à la classe d'élémentaire au Forum de Tregastel.

Gireg Konan, figure connue du Trégor, vient tous les mardis matin raconter des histoires sur le pays, chanter des comptines et chansons qu'il a collectées dans le Trégor. Gireg c'est un peu le « tad-kozh », le grand-père de l'école : il connaît beaucoup de vieilles histoires sur le pays de Louanec, sur les modes de vies d'autrefois, ce qui se disait en breton et ce qui se chantait. Il a même écrit un livre « Eostad » où il réunit des mots et expressions locales.

Kan ar Bobl e Kawan

D'an 12 a viz Meurzh o doa kanet brav-kaer ar re-vras e Kan ar Bobl. An eil plas 'zo bet tapet gante ar bloaz-mañ evit ar c'helc'hiad 2, gourc'hemennoù !

Kan ar Bobl à Cavan

Le 12 mars, les élèves d'élémentaire ont participé au concours de chant Kan ar Bobl à Cavan. Ils ont remporté le deuxième prix dans la catégorie cycle 2, félicitations !



Labour 'zo war ar stern ivez gant ar C'huzul Skoazell ! ⓘ

01/05 Bokedoù Mae a vo gwerzhet en tro-war-droioù (Perros, Louaneg, Kervaria, ...)

04/06 Kermes ar skol. Pedet oc'h da zont evel-just !

10/06 Fest Noz Gouel an Hañv e Tregastell

09/07 Marc'had al laou e Perros-Girec. Evit mirout ur plas : 07 66 83 76 44

03/09 Marc'had al laou e Louaneg. Evit mirout ur plas : 07 66 83 76 44

Le Comité de Soutien reste sur le pont ! A vos agendas ! ⓘ

01/05 Vente de muguet à Louanec et alentours (Perros-Guirec, Kermaria, etc.)

04/06 Kermesse de l'école. Venez nombreux !

10/06 Gouel an Hañv à Trégastell

09/07 Vide-greniers de Perros-Guirec. Réservez votre emplacement : 07 66 83 76 44

03/09 Vide-greniers de Louanec. Réservez votre emplacement : 07 66 83 76 44

Ma fell deoc'h sikour ar skol, e c'hallit donezoniñ, en ur reiñ un nebeud gwenneien (66 % lamet diwar an tailhoù).

Kas a reomp deoc'h da soñj e c'hallit ivez kas houarnaj da di Romi e Lannuon pe da di Derichebourg e Plouilio war kont Diwan Louaneg, leuskel karitelloù liv goulo er skol pe kazetennoù kozh e Landreger (11 straed Kerfant).

Chug avaloù a chom ! 3 gwennege ar voutailhad pe 15 gwennege ar c'harthoñsad 6.

Taolit ur sell war ar pajennoù-mañ gwech ha gwech all evit bezañ kelaouet : hon lec'hienn internet, kont Twitter ha Facebook ar skol.

Si vous souhaitez nous soutenir, vous pouvez faire un don (66% déductible d'impôts).

Nous vous rappelons que vous pouvez également déposer de la ferraille chez Romi à Lannion ou chez Derichebourg à Ploumilliau, sur le compte de l'école Diwan de Louanec. Enfin, il est possible de déposer vos cartouches vides à l'école ou vos vieux journaux à Tréguier (11 impasse Kerfant).

Il reste du jus de pommes ! 3 euros la bouteille ou 15 euros le carton de 6.

N'hésitez pas à consulter régulièrement notre site internet pour être informé ainsi que les comptes Twitter et Facebook de l'école.

Trugarez evit ho skoazell ! Merci pour votre soutien !



SkolDiwanLouaneg
<https://facebook.com/SkolDiwanLouaneg>



@DiwanLouaneg
<https://twitter.com/DiwanLouaneg>

Profoù suraet enlinenn dre
Dons sécurisés en ligne via



<https://louaneg.diwan.bzh/soutien/don/>



skol diwan louaneg
5 hent sant erwan
22700 louaneg
02 96 91 01 34

Anne LE BAIL
Présidente de l'AEP
Prézidantez an AEP
aep.louaneg@diwan.bzh

Maël LE GUEN
Président du Comité de soutien
Prézidant ar C'huzul Skoazell
skoazell.louaneg@diwan.bzh